

AVEL HON LENNEGEZH O C'HWEZHAN (13)

« Pegourz enta e welin-me Roltaz,
Arzh, Izenac'h, Sarzhav, ar vro pinvik ?
Pegourz ec'h in da iliz Lokeltaz,
Hag e evin a win gwenn Illurig ?
Kaer eo gwelet ar bagoù a vizen ;
Mes kaeroc'h c'hoazh gwelet bagoù Sine !
- Ne garzen ket bout beziet amen ! amen = aman, amañ
Gwell vo ma c'horf em broig, mam buhez ! »

A embanne Yann-Vari ar Joubiouz en 1844, beleg ha kargiad uhel en eskopti Gwened. Barzh modern, daoust d'ar gwiskad dalc'het gant framm ar gevredigezh ma oa enni, ha ma oa perzhiek, ha perzhiek mat en enni. En harlu e oa, un harlu micherel bevet gant ur bern beleien tonket da gemer kargoù : mont da Roma, kêrbenn ar Gristeniezh. Kreizenn ar Bed. Kas e studi eno, degemer graoù marteze. Hon Yann-Vari a ouie atizañ e werzennoù diouzh un awen dizarmus avat :

« Me garehe, Rom, ha kaniñ ; ha = da (cf. az)
Mes ha kaniñ ne hellan ket !
Ne hallan namaet ha kariñ namaet = nemet
Dres kement tra a zo er bed !
Pa ne garehen ket Roma,
Petra a garehen enta ? »

Ar vammvro, ar vro a lâro lod, zo asambles gant an harlu an daou du eus ar memes melezour. Mont kuit evit adkavout, a-dreuz an distro hag an diskuliañ.

Ar Mor-Bihan hag e inizi ken niverus hag un duilhad stered en oabl an hañv. Inizi strewet evel en ur milendall oc'h heuliañ aezhenn ur vuhez kuñv lusket gant gwagennoù lent ha didreitour.

Ar memes lec'hioù a vo lakaet da destoù meur romant Youenn Drezen : *An dour en-dro d'an inizi*. Hennezh ivez a gemero harp war un harlu, ken tost d'an hini bet bevet gantañ pan oa mousig, krennard, pe se... En Euskadi. E haroz, Herri Maheo, eus Gwened, a restaol an harlu-se en un taolenniñ e vro c'henedik, ha se d'e vignon Iribe. Eilpennañ ar melezour...

« Breizh-Izel ? baradoz ar torgennoùigoù ; baradoz ar gwez o delioù glas ; baradoz an dour-red. Un dra ouzhpenn, Iribe. Ar mor. A-zioc'h an tarzhoù gwer ha boull, tornaodoù kev o sevel sonn. Er baeoù, porzhioù, moridi, ha bagoù peskerezh. Meur a lev-draezh a gavi, sioul e gwasked an erinoù. Al lanv a sank e kalon ar vro dre an aberioù gwezennek, o tarlipat enezennoù diniverus. Brini du ha gouelini gwenn, evned ar mor hag evned an douar, o troidellat en oabl.
Hag un dra all, Iribe. Ar glav. Ha marzh ar c'houmoul goude ar glav. Euskariz an uhelgompezennoù-mañ n'int ket evit meizañ petra eo geot hir ur foenneg c'hlas, ha chouradenn an avel c'hleb, pa voud ar c'hoadoù pin, hag an dervennoù war o c'hleuz, pe ar gwez avaloù berr ha kromm.
Breizh, Iribe, a zo anezhi koshañ douar ar bed ; debret betek an askorn, garv, ha karregek, ha difrouezh dre he natur. Ar glav, avat, o sevel ingal diwar vor, a ro dezhi un deneridigezh klouar, yaouankiz an Nevezamzer, hag un hoal a zo aner dit klask en em ziluziañ diouzh e roued, p'out bet tapet e-barzh. »

Hon Youenn en deus c'hoariet gant adskedoù ar melezour-se. Ha kalon ar romant berr-se (un novela evit gwir) zo ur galon doubl en ennañ : Anna Bodri, ar vaouez, ar plac'h karet gant Herri Maheo, ha Breizh, ar vro nemeti evitañ.

« Krugell Gavrinniz a zo anezhi ur run douar bet berniet war sebezusañ kambr-vein a c'hellez meizañ. Goullo eo ar gambr ; he speurennoù mein ramzel, avat, a zo engravet enno tresadennoù kevrenn o deus lakaet gouizeien ar bed-holl, hag ar werin ivez, da vagañ meur a breder. ha krugell Gavrinniz n'he

deus ket laosket he ster, na kennebeut mein Lokmaria-Kaer ha Karnag, hec'h amezeien war an douar bras.

...Evel kalon an den, Iribe ; kaer a zo pleustriñ warni.

Hag e tigoris dor houarn 'Ti ar C'horraged', ha ni e-barzh. Ur c'hav. Azaouezus, avat, evel un iliz-veur ha teñval, ponner an aer ennañ ha yen, e-keñver gwrez ar maez.

Neuze e c'hoarvezas un abadenn ha ned ay biken diouzh va soñj. Selaou.

Edon, digomz, o prederiañ gant ar gudenn vilvedel, pa dostaas va c'heneilez ouzhin. Skrijañ'rae evel diwar anoued. He divrec'h a oa noazh, skoaz hag all, ha gwenn-kann en amc'houloù. He brennid, evel an houlenn war ar c'hal, a bigne hag a ziskenne. Sevel a reas davet va re daou lagad, ul lufir enno ha n'am boa gwelet biskoazh. He diweuz a grene un disterañ. Lakaat a reas un dorn war va brec'h, un dornig gwenn ha mistr.

Me, skrignet va dent, tenn va alan.

- Enaouerez !

Hi, duet he sell raktal, a grogas gant un nerzh souezhus em divrec'h.

- Enaouerez ? Ma sankfen dit va dent en da fas, e komprenfes... marteze.

Me an hini a sankas va dent en he skoaz, ken na wadas. Lammet e oa derzhienn warnon. Tennañ'reas un dic'hwezhadenn verr, hag unan hir kerkent goude. Plegañ'reas evel ur gorzenn weüs-meurbet, ma rankis kregiñ enni dre an dargreiz da virout outi da gouezhañ. Ar wezh kentañ, abaoe m'hec'h anavezen, e tistagas va lesanv :

- Herri !

Â ! Iribe, santout, goude bloavezhioù, en-dro d'am souzoug, gwask an divrec'h-se, gwenn, ha sin, ha kuñv ! Â ! Iribe, an daoulagad-se, re splann kent, ha re vliv ha bev, aet en un taol da ziv regezenn o tangwallañ da wad ! Marteze, n'em eus ket meizet, pa oa poent c'hoazh, o fedenn c'hrizias : 'Lavar din ar gomz a c'hortozan !'. Marteze'oa er pennig-se ur goanag a oa din da seveniñ.

Bezañ dalc'het ar c'horf-se etre va divrec'h, bezañ chouret an izili-se, flour ha start, fresk ha klouar war un dro, ha bezañ o lezel da vont... pebezh drouk-hunvre !

He bizied a c'hoarie lentik gant va blev, hag a spine va divjod, ha va chink, ha va malvennoù goustad goustad. Hag e lavare din gerioù-mamm ha kariadez.

Ne ouien mui petra'raen, hag e c'holoen he zal, he diweuz, he c'herc'henn gant pokoù gouez, hag e sanken va dent en he c'higenno, ken na hirvoude.

Â ! bevañ hiviziken – da viken ! - a-gevret gant Anna Bodri, ober anezhi pried muiañ karet va buhez, kenloderezh va strivoù davet an uhelvennadoù a lufre dirak va daoulagad ! N'he dije ket bet lavaret nann, sur on n'he dije ket bet lavaret nann. He daoulagad a gomze eviti. Huanadet he doa adarre, gant ur vouezh o krenañ, div notennig heson.

- Herri !

Peget e oa he furmoù ouzh va izili, ha me stignet va izili ken na ginnigent terriñ. Tripal a rae hec'h askre sko em c'halon. Ma tassone mein ar grugell gozh gant hon div alan denn. Aet e oan mezv ha kroget aar c'hrenerezh em divesker. Ha va dorn gourel ha karget a allazigoù, a ziskenne davet teñzor prizius an divronn gwenngen, frouezh miret ez-elevezel ar gwerzhed yaouank.

- Herri Maheo, nann !

Ur bedenn ! Hag he bizied a waskas va arzorn. Kenderc'hel a risn, ha va mouezh, hec'h-unan, a ouezas pediñ ha kemenn, hag e santen, daoust d'hec'h eneberezh, an dra klouar ha bev, flour evel seiz, o tridal dindan va bizied. Hogen ur wezh all :

- Nann !

Krenn e oa bet distaget ar c'hemenn. Ha me :

- O, Naig, perak ?

Teurel a reas he fenn, ur pennig evel ma ne garin hini ebet biken mui, war va bruched, hag e chomas harpet warnon ur rueziad hir, o tic'hwezhañ. Marteze e ouele. Ne greden ket fiñval. Kerse am boa, ha ha dudi ivez.

Ra'm bije bet laosket, neuze, ar gerioù'oa boureviet va zeod ganto. Ra'm bije bet lavaret dezhi e oan trelatet ganti, e oan aet diskiant, ya ! diskiant gant he spered, gant hec'h ene, gant he c'horf, ha n'em bije gallet bevañ gant aprez all ebet nemeti. Setu ar gerioù a c'hortoze.

... Siwazh !

Aet er-maez eus krugell Gavrinniz, torret ar gazel-ge ! Graet he doa Anna Bodri eus he zu kement a zo aotreet d'ur plac'h yaouank e Breizh. Krediñ a c'hellas n'am boa eviti nemet ar c'hoant a vroud an den davet pep maouez korfet ouzh e zoare. (...) »

Goude un danevellin evel hennezh n'hon eus ket mui ar memes sell war Krugell Gavrinniz ! Ar pezh a oa c'hoarvezet etre Herri hag Anna a chomo da viken dindan evezh troellennoù dibaouez ar meuriad eus ar ragistor bet o tresañ anezhe : emaint evel boukloù, met boukloù digor ha dic'hourfenn evel adskedoù un heol kras ha gor a-us da inizi sioul ar Mor-Bihan, met ivez evel an hentoù heuliet gant an tonkad, meur a donkad ken troellennus all.

N'eo ket diabeteg dibab hon Youenn. Kevreañ karantez tud ha karantez vro, tennañ implij eus an aviskoazhennoù. An aviskoazhennoù, o lakaat da vezañ testoù gwirion-tost eus hon drivliadennoù bresk, betek ar reoù difoupet eus deun hon memor ken bresk all. Ha Bretoned e oa eus an dud-se er Ragistor (pebezh ger dismegañsus pan soñjer ervat !) war votenn Gavrinniz, pe ne oant ket Bretoned ? Evel just ne oa ket eus Breizh c'hoazh. Ha cheñch a ra tra pe dra en karantez Herri hag Anna ? Ar garantez a chom karantez, met en ul lec'h hag a zo ivez un doare keff dason d'o c'harantez. Met se zo an efed goullet gant ar skrivagner !

Ret eo mont betek penn novela Youenn evit kompren ne c'hell ar garantez diskoulmañ ar blanedenn, ne c'hell ar garantez mont en tu-hont d'ar pezh zo tonket ha divizet gant ar gevredigezh. Ar marv zo liesdremmek, an dremm washañ eo ar pezh a vez lakaet war choug an dud gant ar gevredigezh : mervel ha chom bev koulskoude, kement-mañ dreist d'ur garantez kollet. Ane e vefe klask un andon, pe un awen, zoken, en hengounioù pobl. Gwerzioù ha gwerzioù zo, savet sonn war seurt karantezioù difesonet gant ar blanedenn. Met lennegezh klasel ar bed, hini ar C'hallaoued strilhet en hon skolioù, a ro mil ha mil skouer eus seurt tonkad...

Hag ar pezh a ra nerzh skrid Youenn Drezen eo ar weledigezh armet er gweadurioù entre ar garantez tud hag ar garantez vro. Ha piv a lâro n'eo istor karantez Herri hag Anna nemet un istor karantez hon eus ar santimant bezañ bevet, pe da vat pe en hon soñjoù aet gant avel ar vuhez ? Hollvedelezh, ur meizad hag a blij kement da sevenadurioù zo, a c'haller pokat outi dizamant en romant berr Youenn Drezen... ha kement-mañ en skeud ene peoc'hus ha kevrenn Krugell Gavrinniz.

Herve Bihan

Levrlennadur

Youenn Drezen, An dour en-dro d'an inizi, Gwalarn, Niv. 42, Mae 1932, 48 pajenn.

Youenn Drezen, An dour en-dro d'an inizi, Al Liamm, 1970.

Youenn Drezen, An dour en-dro d'an inizi, Skeudennoù gant Robert Damilot, Al Liamm, 2022.

Youenn Drezen, Sizhun ar Breur Arturo, Al Liamm, 1971.

Jean-Marie Le Joubiou, Doué ha mem bro – Dieu et mon pays, poésies bretonnes, Gwened, 1844.